

# GUERZ NEVEZ

## VAR BEN AR BREZEL.

Var don : *Margodik pe Santez Mari, mam Doue.*

C'hoant am euz da implija eun nebeut a speret  
Da zevel eur verz nevez pa zon ken **glac'haret** ;  
Mes goulenn a ran eskuz, tud a skiant, ouz hoc'h,  
Ouz hoc'h holl am chilaouet, ken evit mont pelloc'h.

**Da genta e goulennan ouz ar Speret-santel**  
Gras da rei tan d'am c'halon ha nerz d'am moez izel,  
Ha me a c'houlen iveauz gras digant ar Verc'hez  
Da lakat em muzellou komzou ar virionez.

Me a ia da ziskleria divar ben ar brezel  
A ran an holl galonou ebarz en Breiz-Izel,  
Hag a ra d'ar goad rôdeg didan ar chassepot  
Evit lakat ar vilin da droi var beder rot.

Barz ar bloa mil eiz kant dek ha tri ugent ouspen,  
Aberz an Napoleon oa deut ar gourc'hemen  
Da c'hervel ar zoudardet evit mont hep dale  
Beteg ker Verlin er Prus da ober eur bale.

Eur bale, sonje en han, e rin beteg ar ger,  
Ha pam bo he c'hemeret me teui en dro d'ar ger,  
Ha gant an aour, an argant ambo kavet en hi  
Me vevo em plijadur, ken ná teui ar c'hozni.

Met roue Prus zo potr koz, hag e sonje ive  
Da zont tre beteg Paris da ober eur bale ;  
Soudardet ha kanoliou oa gant han c'hoari ger,  
Na ree netra bemde met sellet euz an er.

Rak se pa oa diskleriet ar brezel ma d'ezan :  
» Me na c'houlennan ket guel, guelomp ta, eme zan ;  
Vid ar brezel beza gret divar beu, eur spiller,  
Diskennomp ni, pa garet, hon daou var an dachen. »

Roue Guillaou oa gant han ouspen eur milion ;  
Ne oa ket tri c'hant mil den gant au Napoleon,  
Var zaouzek e vanke pemp ebarz pep rejamant ;  
N'ouzon dare da betra oa foetet an argant.

Mar dije an Impaler lennet an Aviel  
Ne ket gant eur seurt arme vije oet d'ar brezel ;  
Ar blenier karr en deuz keun, pa ve dre c'hoal henhou,  
Pa neuz ket sellet arog mar oa mad an holl draou.

En tol kentan gouskoude oa gant han an tol chans,  
Hag e skrivaz d'he itron : « lakeat emban dre Fraps ;  
Kaset gin danserezet ha sonerien dispar,  
Fougeou a rer gant ma map, ne gaver ket he bar. »

Met aben d'an eil tolat, chenchet ar ganouen :  
O vont ebiou d'eur c'hoat braz an arme en em denn ;  
Losket bordadou mindrail gant tut na veler ket,  
Kouezet a renkadou hir kezeg ha soudardet.

Aben d'an drivet tolat a glevet eur safar :  
» Troet var ho kis, soudardet, pe nem doft d'an douar ;  
Re zo e pen an arme n'en em glevont ket mad,  
Pa gleont erru abred erruont divezat. »

Ben d'ar bevare tolat an holl a bege du ;  
An Durkozet a grie : « red eo mont tu pe du ! »  
An dragonet a lampe ; ar zouavet blante bec'h ;  
Pa vanke ar bolodou oa ret kuitat al lec'h.

Pa velaz an Impaler ar bevare tolat,  
O vont adreon gant koll braz en devoa kalonnat.  
» Ne a rafe, emezau, va fouez en aour melen  
D'an neb a deufe breman d'am lemel a anken. »

Mam bije gouiet an traou n'am bije ket kuitet ;  
Me garfe mont da Baris da gaont ma friet. »  
Eun dra diez da gredi a zo guir gouskoude,  
Noa guelet gant arme nemet eun heur bemde.

Goude oa leinet d'ezan, etre dek ha unnek,  
E teue d'ober eun dro, eur sigal en he vek ;  
Ken a lavare re goz, o sellet du out-han :  
» Biskoaz na oa eur brezel renet evel heman. »

Ar re goz a lavare pa oant tost da Sedan :  
« Na trik na tres na malis n'enx netra vad en han :  
Gant aoun da gol he vuhe, a zonj end hi pel zo,  
C'hoant braz en deuz d'hon guerza, a dra zur hon guerzo. »

Ha guerzet en deuz distag pevar ugent mil den,  
Pevar ugent mil den mad pa hallent 'nem zifen :  
Hag hen brema barz Prus gant ar roue Guillaou,  
Brec'h ha brec'h ho daou bemdez, mignoned braz ho daou.

Hag hen en eur palez brao en he blijadurez,  
Ar brizonerien, sioua ! er goasa dienez.  
Mar zo tud ebarz ar vro a fi c'hoaz en den man,  
Evit on me vel hanat momp bet guerzet gant han.

Eur zulvez ebarz ar vorc'h e oan souezet braz  
O klevet Mer ar barez o tispleg var ar groaz,  
Ha gant han eun tam paper euz born an otrounez  
A oa o ren e Paris pa oa ar Mestr er meuz,

Eno e teuaz ar Mer da zispleg al lezen  
Hag a lakaz da dridal kalonou mear a zen  
Dre ma teuaz da emban d'ar mobilet kenta  
E oant galvet d'ar brezel pa zonjent nebeuta.

Meuz ho guelet o tremen dre ar ger a mon chom,  
Gant ho zeliou ken nec'het oa piket ma c'halon ;  
» Kenavo, e lavarent, kenavo, main ha tad,  
Ni ia da gas hor buez ha da skuilla hor goad. »

O klevet son ar c'hleier hi a oele dourek :  
» Houman ar vech diveza da velet tour Mellek ;  
Kenavo, kleier Sant Per, n'ho klevimp ket mui ke  
O c'hervel ar gristenien d'ar zul d'an oferen. »

Kriz a vije ar galon ha na oelje, ia, kriz,  
Pa oant var hen ho daoulin stouet barz an iliz,  
Kriz a vije ar galon n'en divije truez  
Pa zellent ken glac'haret ouz oter ar Verc'hez.

Ar re muia glac'haret a oa lod a loske  
Var ho lerc'h digonfortet gragez ha bugale,  
Goude beza en iliz kemert Doue da dest,  
Lennet leor an Aviel gant person ho fares.

» Goude beza bet hon daou dirag an dol santel,  
Setu ni dispartiet gant Ministr ar brezel ;  
An dousa tra zo er bet ez eo ar garantez,  
An trista torri goalen euz ar briedelez.

» Kenavo, bugaligou, kenavo, priet mat,  
Pa oamp deut d'en em garet n'euz ken goas kalonat ;  
Na pa deufe ar maro da lemel hor buhe  
Ve ket goasoc'h eun anken a ve kriz gouskoude. »

Evel se e lavarent kenavo d'ho sudou  
En eur vont da Gemperle da gemer ho armou,  
Ha goude da rei ho goad, hep dont da chipotal,  
Gant he eun taboulinou hag eur meuzik roeal.

D'an naovet dez var nugent euz a viz guengolo,  
Am beuz guelet an ternach hag adare daelo,  
Hag ho deveuz bet galvet ar botret iaouank flamm,  
Ha pa vefint dek ganet en eun ti gant eur vamm.

Ne deuz ket c'hoaz goal bell braz ni hor boa an amzer  
Ar pinvik gant he arc'hant a halle chom er ger,  
Mes breman ne deuz mui ken met lezen an ankaou,  
Na respeter ket muioc'h ar pinvik vit ar paour.

Piou a velfe hep goela anken ar mammou kez  
Euz a boul ho c'halonou goude bet roet ar lez ?  
Piou halfe lakat he zorn, ia, var he goustianz ?  
Trebeteg deon ar galon a ia an toliou lanz.

Meuz guelet o partial ar goard mobilizet,  
A dalek daou ugent bloaz kement a oa dispege  
Rac'h an holl c'hoazet iaouank e oa dindan ho chanz  
Ho deuz kuitaet ar vro evit difen ar Franz.

Euz ar re zo dibblaset lod zo breman maro,  
Lod all a zistro d'ar ger goual ozet a zistro,  
Tapet eun ten en ho brec'h, n'ho gar pe n'ho morzat,  
Kollet gant he ar gallout, n'ballint mui labourat.

Ho guelet a reomp hanat dirag hon daoulagat  
Mac'hegnet, kam ha dinerz hag ount he c'huez ar goat.  
» Leveret d'in den iaouank, o vont gant an hent braz,  
Petric zo digouet gen hoc'h pa gerzet harp eur vaz ? »

» Netra zo digouet gen in nemet eun tol zabren  
Em euz tapet em morzat pa oan var an dachen ;  
Euz a dri-c'hant oamp eno gant an otrou Charret  
N'euz chomet met tri ugent, hag hen anter lazet.

» Leveret d'in soudard koz, o c'houlen aluzen,  
Pellec'h ema bet gen hoc'h kotlet ar sklerijen ? »  
» Ar sklerijen e Paris meuz kollet en eur vont  
Enep ar chas kounaret pa oan gant Map-Mahon.

» Paris rog ar Brusianet en doa dalc'het pemp miz,  
Ha rog chas klan ar ger ze zo ken goas e pep kiz ;  
Ar ger a oa difennet gant dioch tu jeneral Trochu,  
Gant han Bretonet iaouank hag hi potret dioc'h tu.

» Mes pa oa bet gret ar peoc'h ha digoret Paris,  
Ar mobilet a bep bro a deuaz var ho c'hiz,  
Ha setu ar gristenien tre daouarn an diaoulet ;  
Heuzeuz oa dioc'h ho guelet, heuruz dioc'h ho c'hlevet : »

» D'an traon ar emezo, Feiz, lazomp ar veteier !  
D'an traon palez ar Justis ! lazomp ar barnerien !  
D'an traon palez ar roue ! na vo mui roue ken !  
Digoromp ar prizoniou ! diredit, muntrerien. »

» Ne oa ket ar gomz gant he peur lavaret a gren  
Pa oa losket da vale an holl dorfetourien :  
Lazet arc'heskop Paris, lazet ar Barner braz,  
Lazet tré ugent belek, ha menech'ken dinoaz. »

» Devet palez ar roue, ha palez ar Justis,  
Gret ebarz an ilizou traou mezuz hag iskiz,  
Torret tolennou ar zent, stlapet ar relegou,  
Beteg var dol an oter gret bep seurt viltansou. »

» Ken na oa laket an tan e pevar c'horn ar ger  
Gant tan deut diouz an ifern, tan petrol hen galver.  
O klask mouga an tan ze meuz kollet ar guelet,  
Abarz ma oa chadennet gen omp ni an diaoulet. »

Aotrou Doue ! ma Doue ! ho pet truez ouz omp !  
Brezel gant ar Prusianet, ha brezel etre z'omp !  
Ni zo bugale displet, mes c'hui zo hon tad mat,  
Dre galon hon breur Jezuz, hon dizammet timat !

Pelleet ouz hor bro ni ar Brusianet ifam  
Ho deuz laket var nomp ni ar spont hag an estlam ;  
Dindan mogeriou Paris zo deut da ziskoutal,  
C'hortoz ho pemp miliard mant c'hoaz o tiehougal.

D'ar Pap a zo prizoniet ha d'ar rouantelez,  
Ma Doue, rentet ar peoc'h, rentet ho madalez ;  
Digaset en dro d'ar vro ar re zo divroet,  
Digaset endro d'he vamm ar map e deuz kollet.

Digaset da vad re glaoñ a gorf pe a speret,  
Digaset ar sklerijen d'ar bec'herien kalet  
Ho deuz treujet an hent mat evit mont d'an ifern  
Da zevi da viryiken enc kik hag eskern.

Aotrou sant Per benniget, patron euz va faroz,  
A zo gen hoc'h en ho torn alc'hue ar baradoz,  
Digoret, en han Doue, da botret Breiz-Izel  
Ho deuz kavet ar maro var dachen ar brezel.

Aotrou sant Per benniget, patron euz an iliz  
Am euz pedet a galon aboue ma iaouankiz,  
Gret d'ar zoudardet maro, d'an holl evel d'ime  
Da zonet d'en em velet e baradoz Doue.

Me a zo eur c'hrouadur hag e oa paour ganet,  
Paour on kontant da veza keit ha vin var ar bet,  
Me na c'houlennan netra met iec'het ken dahen,  
Illa goude ma vin maro ar vuhez da viken,

Tregont bloa zo e paroz Sant Urien oan ganet  
Ha var vrec'h va magerez d'he iliz digaset ;  
Guader eo ma mecher var zouarou Mellek,  
Eno meuz gret ar verz man en eur voela dourek.

An neb en deuz he sinet dre zinatur he zorn  
A zo bet e kamp Konli pa oa goansan ar zorn,  
Hag hi lak var ar baper evit hi rei da len  
Da neb en defo klevet he c'hana pen da ben.

Pa vo echuet kana pedomb holl var eun dro  
Vit ar zoudardet iaouank zo maro mez ho bro ,  
Displegomp mad a c'henou, ha goelomp a galon,  
Houman ez eo ar c'hanat a ia beteg an Tron.

*De Profundis*